

178

## Chanson Nevez.

(196)

Var ton :

M'am be avoalc'h a studi, ha speret da rima,  
 Eur bluen ebars em dorn, ha me prest da scrifa,  
 Me a rafe eur reglen erve ma zantimant,  
 Sujet d'an antretien entre daou zen yaouanq.

Gent erit comz davantach e c'houllyan assistanq  
 Eus ar sperejou caëra gent erit er c'hommang,  
 Da rei lumier d'am speret, pa meus intansion  
 Da ober eur zom nevez pa meus ocasion.

Me zo eur bug'el yaouanq o poursuir va studi,  
 Hag emeus bet er bloa-ma calz a velanconi:  
 Pa deuan da gontempli em amzer dremenet  
 Ha d'ober reflexion em planeden galet.

Na pa lennan eul kor zo em c'habinet-studi,  
 E cavan traou surpronus hag a ra chagrin din,  
 Pa lennan va flanneden zo scrifet varnezi,  
 Eus va brassa plijadur em be melanconi.  
 Pa lennan va flanneden, scrifet gant va mestrez,  
 Eus va brassa plijadur em be tristidig'ez.

(197)

Mès muia tra am gra trist hag a ra chagrin din,  
 Ez eo clêvet eur voez cren o tout da laret din:  
 « Te a zo qeuz d'an amzer p'ini 'heus implijet,  
 » D re garout es calon an neq na carnie get. »

Genta biscoas m'e quelis, an dra-se zo certen,  
 E voa e corn ar porchet, goude an oferen;  
 Her caer hag an eol brillant corg'et a sclêrijen,  
 E remerqis va Mestrez e porchet Sant Drien.

(198) Hag an eil quech m'e quelis, assuri en allan,  
E voa ebars en ilis bet o comunia,  
Ec'h ober he faso genta etouez ar rugale;  
D'ar c'houlz - se hi voa yaouanq ha me a voa ive.

A ben eun nebeut goude voan er scol en L'penzamp,  
Hag hi er memes amzer voa ebars ar Gouant;  
Ma teuis da zilezel va education,  
E't dont d'e antreteri eus a greis va c'halon.

E teuis d'e saludi Rouanez ar flewyon,  
Eus a g'ement a zivoan ebars er jardinou.  
Debonjour d'ec'h, merc'h yaouanq, eus a greis va c'halon,  
Me zo deut d'o saludi eus a berry Lupidon,  
Prinç an oll amourouset, Roue an dud yaouanq,  
Ha c'houi a deu, dre ho sellou, d'am renta lang'issant.

(199) Augmanti ra va joayou, p'o clêvan, den yaouanq;  
C'houi ar reglen necesser ebars en zantimant:  
Trionfant eo va c'halon p'a glêvan ho comzou,  
Evel ma ve eun ene mat prest d'antren er joayou.

Pel zo demeus a amzer me am boa deziret  
E vizac'h deut d'am zaludi erit on na caret,  
Nonobstant da g'ementse ne r'ec'h get a zeblant,  
Me am boa displijadur, m'en devoa merc'h yaouanq.

Memeus quelet alies dizanval diouzin,  
Mari, Mari, va mestroz, eus o tarempredi,  
Tud hag a zo puissant, o deus renq ha leve,  
Me ne meus get a vadou, gout avoalc'h a rit se.

Gement mat zo er bed - ma gant va Doue crouet,  
An oll aour, an oll arc'hant, en eur bern destimet,  
Ha p'a ve r'et da eun den bigen na ve contant,  
Ma n'en deve ar bonheur da bossedi e c'hoant.

(200) Hag ousten a zo arze, emezi, va zerricher,  
Ar madou hag an arc'hant a eller da ober,  
Hag an neb a ve demest enep e zantimant,  
N'el get terri e varc'hat erit aour n'ag arc'hant.

-180

Sur ha certen, va Mestrez, ma v'jeñ studiet,  
Ha me capabl da scrifa eur reglen, m'em boa grêt  
Bars en cayer va studi, demeus ho prepozioù,  
Rag disfiarz a rit din, pa glêvan ho comzou.

E leal, va zerricher, va c'hredi a ellet,  
Me a sinfe gant va goat ar peñz ameus haret;  
Ha mar qerit va c'harout, mat e c'hallit credi  
Ne vo nemet ar maro capabl d'or separi.

Me ya brema d'o quitat, eleal, va Mestrez,  
Diouallit vis-a-vis din na vec'h godisserez;  
Rac va c'halon zo tener hag a vo glac'haret,  
Mar deu dec'h d'am dilezel goude o re garet.

Pa voan eun deiz em jardin em oll gontantamant,  
Me remerqas eur fleuren a voa caer ha brillant;  
Qen caer e voa he deillou evel an eol ardant,  
Pa deu dezân da bara ebars er firmamant. (201)

Ha mar deu dei dizec'ha, assuri a allan,  
E laqai va c'haloniq var ar poent da ranna:  
Hounes eo ar femellen, erve va fantarzi,  
Ingravet bars em c'halon, dies da effassi.

D'am drivet sul a vis east, goude an ofern bret,  
Me laqas em fantarzi, hag ive em speret,  
Mont da velet va Mestrez, rouanez va c'halon,  
Va flizadur er bed-ma, va c'honsolation.

Debonjour dec'h, va Mestrez, em devez a hirie,  
Gant eur galoniq joayus evel zo ganeme;  
Gouscoude pi' em em sonjan e zeo din lavarret  
Ne ran nemet coll va amzer o tont d'o talempret.

O! tavit, va zerricher, na deuit get da gredi  
Ar quel deodou millig'et zo' e clasq hor separi;  
Ha pa vec'h dispennet din munutoc'h evit pel,  
Se ne rafe get din-me donet d'o dilezel. (202)

Eun devez dreist ar re all e lavaras din-me,

E tont eus an nad pardon ebars lein ar mene :  
 Mar g'illit chench a ganton ha pellât disuzin,  
 Ar quel-deodou millig'et a deui d'or separi.

O ! salocras, va Mestrez, ne arvus get se,  
 Bigen ne vemp separet erit eus va c'hoste,  
 Gen a deuyo ar maro vit on dispartia,  
 Da vonet da rentâ cont da Grouer ar bed-ma.

Aben euy nebut goude e voant dispartiet,  
 An effet eus e c'homzou a zo quir approuvet ;  
 Neus netria var an douar a zo qiriec da ze,  
 Nemet ar queldeodadou zo o vale nos-de.

(203) Neus netria var an douar, ya, m'en assur erfat,  
 A sco euy tol gen mortel evel eur goel-deodat ;  
 Honnes a deu da dervi chaden ar garante,  
 Nemetan hag ar maro n'en deus capabl da ze.

Na pa voan em orêzon noz Gouel ar Rouane,  
 Me a gles euy eon er jardin, hennes a game g'yê,  
 Na ma lavare an eoniq qer facil dre e zon :  
 Erma da ruia caret en desolation.

Te zo q'iriec d'e glac'har, o tonet da gredi  
 Ar goel-deodou millig'et o separi ;  
 Mes retorn c'hoaz d'e c'havet, ha sent eus va c'homzou,  
 Pec'het eo o separi, m'en em garit o taou.

(204) D'ar mintin, pa voan savet, me scrifas eul lizer  
 Da gas d'an muja caret, dre zorn ar messajer,  
 Da glêvet e zantimant, vit ar vech direza,  
 Quell e zeo mervel buan vit chom da lang'issa.

Pa ervuas ar messajer bars en ty va Mestrez,  
 E vse dig'emeret mat, vit e zivea quech.  
 Gemer a ras al lizer hag antren en he hamp,  
 Da scrifa din va c'honje neuze souden vatant.

Ho setanç a c'houlennit, emei, va servicher,  
 Assuret oc'h d'e gavuet ebars en ber amzer ;

182

Ma vizac'h d'am zantimant mat e c'hellit kredi  
Ne voa nemet ar maro capabl d'or separi.

A ben eur neubent goude e teuas va mignon  
D'am c'haout ebars er verret pi'oa an ofern o son;  
Seti arze eul lizer, me o ped d'er sellet,  
Roet din da zigas dec'h gant ho muian caret.

Demer a ris al lizer a zorn ar messajer,  
Hag antren em c'habinet pa ervuis er g'er;  
Pa lennen ar prepozion scifet gant va mestrez,  
E lajent bars em c'halon calz a dristidigez. (205)

Dig'emenz rê ac'hanon da ervuout ganti,  
Bars en eur plag a goste gent vit an dispartu,  
Da dervi ar bromessa a voa entrezomp gret,  
Vit rentâ 'n eil d'egile ar pez a voa gleet.

Debonjour dec'h, va Mestrez, en devez a hirie,  
Gant eur galon contristet, vel a zo ganeme;  
Rac ma ranqan o quitat, me a garre berza  
En creiz calon an douar, ellec'h moquelis genta.

Ne ell get va daoulagad miret da scuill daëlou,  
Sur ha certen, den yaouanq, pa glêvan ho comzou;  
Na ma vizac'h bet fidel bars em andret bepret,  
Birvigen mat nemedoc'h n'am bize eureujet.

Mes na brêma na goude, an draze zo certen,  
An amzer din d'o carout ne arvus mui gen;  
An amzer din d'o carout ne arvus mui gen;  
Pa voan en ho polonte, e voa dec'h va goulen. (206)

Me o ped, oll, yaouanqis, a bep seurt qalite,  
Da ober reflexion var pez a lavare.  
An hini 'voan pell amzer eur e zalempredi,  
Na ne voa bet gouscoude entrezomp fachiri.

Ha pa vije eur mignon eus o lavaret din  
E vijec'h traitourez em andret, na gredjen da hini;  
Mes c'houi deu da zigoue din dre an experianç;

Adieu d'èc'h, traitourez, adieu, va oll fianç.

Brema me zavo un dourel ebars lein ar mene,  
Ractal d'o ty, va Mestrez, ha d'am kini ive,  
Da ober reflexion em c'halon, em speret,  
Ha da voela gant glac'har d'am amzer tremenet.

(207) Me ameus grêt ur boqet eus a zivision,  
Tuy ameus lezet ennan en setañ va c'halon,  
Armeus-me bet compozet a zaelon daoulagat,  
Ha d'en erren eur ruban livet demeus va goat.

Me o ped, cos ha yaouanq, demeus a Sant Drien,  
Pa gl'efot e vin maro, larit peb a beden,  
Ha larit d'ar véleyen donet d'am ant'erri  
Ebars er c'heur huella, e peñ ar marchepi.

Lazit eur groas var va be, ha scrifit varnezi,  
Da laret penos e vin marv gant melanconi.  
Pedit Done evidon, beuzet on em glac'har,  
Ne zezir gen va c'halon nemet mont en douar.

Ebars e gichen Sant Roc, tost da lein ar mene,  
Eus eur Rossignol bian, o cana nos ha de;  
Biscoas n'em boa én cl'evet o cana gen charmant,  
Evel ma rê en nos all var un ton excellent.

(208) Me voa o retorn d'ar g'èr eus a dy va mestrez,  
Ha carg'et oll va c'halon eus a d'ristidig'ez;  
Pa voan erru tost d'ar g'èr eus a dy va mignon,  
E voa var lein ar mené o fredoni e zon.

Ha me hag oc'h arrêti, hag o chom complèzant,  
Rac eur chanson a gane, a voa divertissant.  
Cana a rê gen charmant, cana a rê ger g'yè,  
Rejouissa 'rè calon qement den er c'hilève.

Arça eta, den yaouanq, t'e a zo arrêtet  
D'am selaou-me o cana, terrubl out contristet;  
Petra ra dit neum nec'hi er bed-ma gant da chang,  
Pa ze quir e c'heus madou ebars en abondanç.

184

Te zo er g'êr dizourci gant da vam ha da dat,  
 Ha ne c'heus necessite a voed nag a zillat;  
 Ha me zo ama o cana, ha joaüs va c'halon,  
 Ha nemeus qet er bed. ma nep sort pourvizion.

(209)

Finissa ras e brelat en eur memes instant,  
 Ha rentet gantan joaüs calon an den yaouanq;  
 Guechal m'em boa eun amzer a zezolasion,  
 Ha brêma ouy triumfant ha joaüs va c'halon.

Pa deui an nevez amzer ar bleun bars er sperm guen,  
 E vo quelet ar merc'het joaüs en pep tachen;  
 Gement nation coat a zo ebarz er c'hoazjou  
 A vo oll rejouisset, goloet a zeillon:  
 An oll fleur er jardinou a vezo fleurisset,  
 Calonou an dud yaouanq dre lêvar c'horn ar bed.

Aben eur blavez goude ma voamp dispartiet,  
 E remerqis va mestrez, ma caris voa chanchet;  
 E remerqis an daelou demeus e daoulagat,  
 De'h abeurri he c'halon, carg'et a huavad.

Debonjour d'êc'h, plac'h yaouanq: petra eo 'r chanchamant  
 A remercan-me hirio en ho comportamant?  
 Diverza ma o quelis, voa brillant ho sellou,  
 Hag herio n'o remercan nemet o scuill daelou.

(210)

Hag hi o respont din-me ia en eur g'êr ber:  
 C'houi zo giriec d'am glac'har, emêi, va zerricher:  
 Retornit c'hoaz d'am c'havet, ha me vezo contant  
 Da rezina va bue evit cavet va c'hoant.

Memeus quelet, alies, daouest ma zoun yaouanq,  
 Malet ha femelezet hag a ve puissant,  
 Hag a lêze da dremen neb o dije cavet,  
 Vit o fedi da retorn, na rent seblant ebet.

Bete vrêma, va mignon, me voa en esperanq,  
 Goude va zisplijadur da gavet recompanq;  
 Me c'hoare ganen breman, certen, va mignon q'ez,  
 Vel eun ene condonnet da vont d'ar flamou gries.

(211) Sur ha certen, plac'h yaouanq, c'houi pini a voa bet  
 Ar g'enta crouadurez, imprimet em speret;  
 Mes daelou va daoulagat o voela nos ha de  
 O deus renqet ho forci da dehel ac'hane.  
 Mes, na brêma na goude, an drase so certen,  
 An amzer din d'o carout na errus muiqen.

Brêman ac'heus c'hoant clêvet fiou eo an dud yaouanq;  
 I - ~~in~~ get o hano, rac na vent get content.  
 Pa na bermet get Doue vent o daou unisset,  
 Ne larin get o hano, rac ne get permetet.

Ebars en treo Sant Drien, e voant o daou mag'et;  
 Bet o devoa eun amzer en em garient parfet;  
 Mes avel ar yenien a zo et entreze,  
 Ha a zo deut da dervi chaden ar garante.

Fin.

(Vol. II, p. 196-211.)  
 58 str. numérotées.